



# HISTOAR

ADMIRABL 79

## DEMEUS AR BOUDEDEO,

*Pehini abaouez maro hor Salver ne ra nemere  
bale nos ha deiz, ac'han d'ar fin ar bet, abala-  
mour d'an affrontery en devoa bet en andret  
hor Salver, pehini, pa voa o vont d'ar maro,  
e fallas dezàn disquisa var e stal, hac e teuas  
d'er rebuty evel ur scelerat.*

Var don : *Guers Santes Anna.*

---

**A** Ssistantet honorabl didostait da glevet  
Eur vuez ar piroyapla mar boa biscoas er bet;  
An histoar so truesus demeus ar Boudedeo,  
So nos ha deiz o vale abaoue hor Salver maro.

A dribu Nephtaly deus a Jerusalem,  
Va hano Absarius ententet christenien,  
Dont a ris var ar bet-màn en amser Herodes,  
A fallas dezàn masacri Jesus map ar Verc'hes.  
Va zat a voa eur c'halvez, va mam quemeneres,  
Hac a laboures en templ ebars en broderes,

Va c'herent am descas da len leor al lesen  
 Hac hini ar brofedet ivez a dra certain.

Goude e voan demesfet gant va c'herent d'ar fin,  
 Da ur vrec fur ha prudant a dribu Benjamin,  
 A behini em boe tri buguel d'an amfer ma teuas  
 An âtrou fant Ian Vadezour da bresc ar messias.

Sant Ian a gonvertiffias cals deus ar bayanet,  
 Pere a voa idolatret caledet er pec'het,  
 Dec mil den en un devez en deus bet badesfet,  
 Me, va grec ha va bugalez a voa bet o velet.

Va friet a lavaras din, va friet, emezy,  
 Lequeomp en ur vadesy hennont eo ar messy,  
 Ha m'en lavaret dezi gant un air direspet,  
 Na ny nac hor bugale na vimp quet badesfet.

Da ben un neubeut goude se fant Ian voe dibennet  
 Gant ar roue Herodes un den cruel meurbet,  
 Ha ma teuas hor Salver evit reign en e blaç,  
 Hac a eureu dre ar c'hanton cals a viraclou bras.

Guelet emeus bet Jesus alies o sermon,  
 Hep n'emeus bet profitet deus e bredication,  
 Va-unan e voan presant p'en devoa raffasiet  
 Dec mil den gant pemp bara ha goude se pemp pesq.

Me Boudedeo malheurus a velas c'hoas ouспен,  
 Jesus o reffuscita lazar breur madalen  
 Ha guelet dibossedi cals a dut possedet,  
 Ha, siouaz din pec'her bras, n'emeus tam profitet.

Da ben un neubeut goude se voa Jesus quemeret,  
 Gant cals deus a juderien er jardin olivet,  
 Ha condaonet gant Pilat neuse evit douguen  
 Ar groas pouner ha mezus evit ar pec'herien.

Pa voa ar groas achuet d'hor Salver voa samet;

Da vont da venez calvar da veza crucifiet,  
 O velet an dut o redec me guemer va buguel,  
 Ha monet da dall an or d'e velet o tremen.

Chetu Jesus o tremen neuse abiou va zy,  
 Pehini en tal va stal a deuas da repofi,  
 Ha me a laras dezàn gant eur goms arrogant:  
 Quee aleffe deus va flal, te so un den mechant.

Cannet on, defonoret gant da effrontery,  
 P'ho guelàn o repofi amàn en tall va zy,  
 Quers aleffe, den ingrat, forcer hac affronter,  
 Quers aleffe d'ar maro pa eus y meritet.

Jesus a respontas din gant eur vouez treufus,  
 Mont a ran da partia, den fall ha den malheurus,  
 Me reposito gant va Zad, te valeo bepret,  
 En pevar c'horn ar bed-màn ac'han da fin ar bet.

Certen te a valeo ac'han d'ar jugeamant,  
 Hac en-tu deou d'am Zat em guelo assuramant  
 O jugy ar bec'herien pere vo condaonet  
 Da vont d'ar flamou gries, ar re just d'ar joaüflet.

Pa glevis comfou Jesus va c'halon voe touc'het,  
 Ma rois neuse souden va buguel d'am priet,  
 Ma velis ar veroniq o sec'hi faç Jesus,  
 Ma chomas en he mouchouer e bortret truefus.

Hep gallout en em arreti e heulis hor Salver,  
 Ha ma velis hor Salver ha cals a graguez santel,  
 Unan deus ar vourrevien d'ar Verc'hes en deus  
 lavaret,

Chetu amàn an tachou ma vo ho map staguet.

P'am boa guelet hor Salver o vervel var ar groas,  
 E creis entre daou laër gant cals a boaniou bras,  
 Ha me comañç va beach gant cals demeus a anquen

O tont da lavaret adieu d'ar guet a Jerufalem.

Comprenet oll, bretonet, peguement a c'hlac'har

En deus ar Boudedeo bremàn var an douar,

Ranquout quitat e gartier, e vrec, e vugale,

Hep gallout e nep façon quimiada d'oues

Pa en devoa bet baleet un nombr a zevetiou,

E erruas en egypt pell bras demeus e vro,

Enon ema ar mor ru ma voa bet passeet

Moises gant bopl Doue hep caouet drouc ebet.

Mont a ris deus ac'hann da enefen candy,

Elec'h ma meint en noas an dut a so enny,

Neufe e velis un tad o trec'hy a damou

E verc'h evit sacrificq evit e zoueou.

Mont a ris da malc'hado elec'h ma zeus tud droll

Pere a ador Doue hac ive an diaoul,

Pedi a reont Doue da rei de prosperite,

Hac an diaoul a bedont na rañ quet a zrouc des.

Guelet ameus er Japon eur vrec a voa cruel,

Pehini a deuas da laza fiouas he daou vuguel,

Er vro-ze eo permetet laza ar vugale,

Pa n'en deus quet a vara o man da rei dese.

Goude e guemeris va hent da vont da enefy,

En Americq, en Affricq hac ivez en Turqui;

Ar grague deus ar vro-ze a ya tout d'an arme,

Hac an ozac'h en deus ar soign demeus ar vugale.

Enon emedy ar c'his da laza ar botret,

Nemert unan e pep famill ne ve jamæs miret.

Beza o deus eur rouanes a ro commandamant,

Da laza tout ar malet hep caouet de damant.

Er guet eus a gan'or ez eus ur c'his droll meurbet,

Car enon an dut yaouanc pa vezont eureuget,

E ranquo ar plac'h neve nos quenta he euret ;  
Mont da goufquet gant ar prinç evit beza enoret.

Bet on ebars en eur c'hoat hanvet cifaria ,  
Elec'h ma eller hale bepret cant leo e-unan ,  
Hep caout dour da efa na feunteun na rivier ,  
Hac a so incommod bras d'an dut so er c'hartier.

Mont a ris c'hoas pelloc'h d'ar guer a mosopa ,  
Pehini so deus en divoal ar prinç a so enna ,  
Eur vanden chaç ha merc'het en deus evit gardou ,  
Ha n'en deus quer soudardet evit difen e vro.

Ac'han e teuis da eur guer so hanvet Estopy  
Elec'h ma zeus ser pantet ha loenet vil enni ,  
So quen teo ha corf un den ma vent musuret  
O deveus d'an neubeuta dao ugent troatat her.

Er spaç demeus a gant vla ez on bet o vale ,  
Ha m'en arruout adarre em bro hac em c'hontre ,  
Ne vellis pelloc'h enon na grec na bugale ,  
Na den ebet deus va bro c'enten n'em anaviet.

Neufe e teuis da Rôm ebars en Italy ,  
En amfer-ze e voa cals deus a c'hlac'har enni ,  
E velis martirifa nombr bras a gristenien ,  
En deffot na garzent renonç d'o feiz ha d'o lefen.

Me a vale var ar mor couls ha var an douar ,  
Ha me partias neufe da vont er franç ractal ,  
En Marseill hac en Paris, hac en Leon sur on ,  
Hac ac'hane da Vretagn d'ar guer deus a roason.

Guelet emeus montroulez ne voa nemet ur c'hoat  
Ha guelet Brest ha Quemper ebars an douar prat ,  
Ha guelet ar guer a lis en he frosperite ,  
Hac ar guer a Lexhobie emeus guelet ive.

Me ameus guelet Bretagn en coat ha menejou ,

Ma voant evel sauvaget neuse ebars er vro,  
 Bremàn me vel changeamant abaoüe ma zon bet,  
 Me a vel cals a gueriou er vro-ze batiffet.

Me vel ar guer a roason eur guer gaër batiffet,  
 En Dol hac en Sant Malo, Dinan hac an Naunet,  
 Sant Briec ha Landreguer, Lannion, Montrouilles,  
 Castel-Paul ha Lesneven ha Landerne ives.

Ar c'heriou-ze ameus guelet en coat hac en prajou,  
 Pa deuis da ober va beach quenta ebars er vro,  
 Chetu batiffet Quemper ha Brest ha Recouvranç,  
 Quemperle ha Gueraes ebars en assuranç.

D'ar fin pa zon condaonet gant Doue da vale,  
 Me so bet en em gavet ebars en meur a arme,  
 Canolliou na fufilliou, cleze na sabrennou,  
 Netra n'en d'eo capabl da rañ din ar maro.

Bet on ebars en listry a so bet periffet,  
 Hac an dut a voa eno ameus guelet beuset,  
 Ha me hanvet Boudedeo n'am bige drouc ebet,  
 Comsou Doue a renquo beza accompliffet.

Condaonet ez on gantan da chom var an douar,  
 Comprenit oll christenien hemàn so din glac'har,  
 Va zourmanchou er bet-màn biquen na finisso,  
 Quen na dui Doue da varn ar beo hac ar maro.

Ar som eus a bemp guennec so em godel bepret  
 Jamæs gant nep fort clanvet me n'en don attaquet,  
 Bet on ebars en broyou elec'h ma voa ar vocen,  
 Hep n'am eus staguët ouzin na clènvèt nac anquen.

Va boutou na va dillat jamæs ne usont quet,  
 Dre bermiffion Doue am eus bet offancet,  
 Peder gueich am eus redéc pevar c'horn ar bet-màn,  
 Ha guelet am eus ive cals chanchamant ennàn.

Bremàn ez on commancet da redec ar bempet ;  
 Hep n'en don ambarraffet gant dibry na coufquet ,  
 Guelet am eus bet broyou a so bet ruinet ,  
 Ha cals demeus a gueriou gant ar gurun devet.

N'emeus quet cals amfer evit chom da barlant ,  
 Me a gred ema va zreit ato var glaou ardant ,  
 N'en deus nemet Doue a alfe discleria ,  
 Ar poaniou bras a souffràn evel ma reposàn.

Pebez malheur eo din-me da veza rebutet ,  
 Demeus a guichen va stall Jesus Salver ar bet ;  
 Pa voa o vont d'ar maro a zeuas da zisquifa ,  
 Ha me neuse dre valheur a zeuas d'e veprifa.

Hemen eo ar malheur bras emeus var ar bet-màn ,  
 Emaon bepret o vale ouспен seitec cant vla ,  
 Ha c'hoas e ranquet bale ac'han d'ar fin ar bet ,  
 Pedit Doue evidon ma zin d'ar joaustet.

F I N.